

Bal Plinn

Ar gwashañ taol `m eus graet biskoazh

(Ar vamm gozh – Lomig Doniou)
(Enregistrement Marcel Guillou et Erik Marchand)

Ar gwashañ taol `m oa graet biskoazh

(A) oe diwisko Mamm-gozh en noazh

*Troit millig, distro millig, chañchomp millig
Kaminelig, joli gouli goule*

(A) oe diwisko Mamm-gozh en noazh

A freilho anezhi gant (bonel)_{belon} glas

Gwisko dezhi kroc'hen un ejen

Dont d'an ofer_{enn} da Laruen

Pa oa erru toull an nor-dall

Komañs he c'hernioù da strakal

Ken _a lâre ar person d'ar sakrist :

« O arri eo an diaoul _e-barzh un iliz ! »

Ken _a lâre ar sakrist d'ar person

« _E-barzh un iliz zo deuet ul lo_{en} ! »

Nag ar person, gant troad ar groez

`Klask lakat ma mamm-gozh e-maez

Chitet, chitet , person iñfam

Na rit ket an diaoul deus ma mamm

Na rit ket an diaoul deus ma mamm

kar `deus ket laosket met ur bramm

(version Marcel Guillou et Erik Marchand)

« Hola, hola eta person kozh

Ne lâret ket an diaoul deus Mamm-gozh

Hola, hola, eta person kamm

Ne lâret ket an diaoul deus ma mamm

Ne lâret ket an diaoul deus ma mamm

Kar n'he deus laosket nemet ur bramm ! »